

DA

*Zant Milion*

War don « *O ma ine, kanomp bemde.* »

Diskan

*Zant Milion,*

*C'houi hon Fatron,*

*Skuillet war-n-omp ho pennoz,*

*Gant ho sikour*

*Hag hon labour*

*Ni ielo d'ar Barados.*

I

Jilaouet ar c'han dudiuz

A zav euz hon c'halono ;

Ma pedet evidomp Jezuz

E kersfomp war ho roudo.

II

Ann estik a gan er c'hoajo

Mil meulodi d'he Grouer ;

Hag he c'hoezen war ann ancho

Zopeden al labourer.

III

Ma oar meskan gand he c'hoezen  
Ar wir beden a galon ,  
Keit a redo dour er zaonen ,  
Vo zur mad kristengwirion .

IV

Mesaer denved, pa oac'h bugel,  
C'houi a gar ann dud dister ;  
Gret ma vezimp bepred fidel  
D'ann Iliz ha d'hon Zalver .

V

Paour a zanve oc'h bet ganet,  
Evel Jezuz ann Otro ;  
Abred avad a oe brudet  
Oac'h pinvik enn burzudo.

VI

Eunn dewez dre nerz ho peden  
KOAT enn BARA a droe .  
D'ar re DALL roec'h SKLERIJEN  
D'ar re VARO ar VUE

VII

Klenved ar c'horf n'en eo netra  
kichen klenved ann ine  
Euz ar pec'hed ann distera  
Hon pellaet 'nn han' Doue.

VIII

Allaz ! ni a zo pec'herien  
Hag evelkent tud a Fe  
Kendalc'het beo enn hon zraouienn  
Ar Fianz ar Garante .

IX

D'ac'h eunn Iliz ni a zavo  
Ha na devo ket he far,  
C'houi zo mad ha deuz ann Envo  
A vinnigo hon douar :

X

Deuz a Wenet ho kenñvroiz,  
Pa do klevet ar c'helo,  
Drant eleiz a zeui d'ann Iliz  
Haganimp- ni a gano :

XI

Ho pinijen, ho santelez,  
Ho karante' vit ar paour,  
A rei d'impzellet ar furnez  
Gwelloc'h danve'vid ann aour.

XII

Neuze'veld'hoc'h elfomp laret,  
Pa vefomp prest da vervel,  
« Pegoulz ec'h in-me da welet  
« Jesus hag he vam Zantel? »

XIII

O zant Milion binniget,  
Miret parrouz Logivi,  
Gret ma reno, vel m'eo gleet,  
Doujans Doue enn peb ti.

**Ann Tourneur** person *Tonquedec*

---

An otro 'n Eskob ro

Daou-ugent de induljanz  
d'ann neb a gano arc'hantik-man.

SANT-BRIEK 6 MAE 1885.

A. Dubourg *Vikel-vras*

Propriété de l'auteur.